




PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 58-59 (Mensuel)

Ebrel-Mae 1953

Abonnement : 500 Francs

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1952 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant. O fed start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.
Koumanant a enor : 600 lur.
Madoberour : 1.000 lur.

Kas an arc'hant da : V. SEITE, Bleun-Brug, 65, rue Y.-Collet, Brest.
C.C.P. 544.22 Nantes, hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Cure de Saint-Renan (Finistère).

TAOLENN

Beza kristen	1
Kaoñv (Maro Tangi Malmanche)	2
Eul laeradenn iskis	4
Bleun-Brug Chateaulin	5
Film Salaün ar Foll	6
Bretoned Pariz	7
Ar Grasou evit ar re varo	8
Yun ar Gomunion	9
Anaout hor yez	10
Selaouit-ta, yaouankizou Breiz	11
Abadenn-studi ar Bleun-Brug	14
Lizer Skol Veur ar Varzed	17

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — G.P.F.P. N° 21697



133671

BIEZA KRISTEN

RESUREKSION Hor Salver n'eo ket hepken brasa mirakl eus istor ar bed. Bez ez eo ar maen-diazeuz eus hor feiz.

« **Ar C'hrist, savet a varo da veo, hiviziken ne varv mui. Ar maro n'en do morse galloud ebet warnan.** » Beo eo da viken. Evit an den digreden, Jezuz a zo eus eun amzer all, eun den, brudet bras, eus an amzer goz. Evidomp-ni eo eus « **dec'h, eus hirio, eus atao** ». Beva ra en neñv, en Iliz hag en eneou, hag e « **rouantelezh a bado da virviken** ».

Dija, er bloaz 60, eun den a renk uhel, gouarnour Sezare, e lano Festus, o ro eus ar feiz kristen eun depeign berr ha frêz, pa ra meneg, dirak ar roue **Agrippa**, eus an tabut savet etre ar Juzevien ha Sant Paol « **diwar-benn eur Jezuz bennak hag a zo maro hag a fell da Baol lavaret ez eo beo** ». Beza kristen, hirio, evel en amzer Sant Paol a zo kredi ea Jezuz atao beo.

Kaeroc'h, beza kristen a zo, en eur c'hiz, kaout perz en e resurreksion. Hen eo ar penn, ni ar memproù. Dreizan, ar vuhez nevez a zo roet d'eomp, ar vuhez-se, graet gant ar c'hras a ro santelezh, hag a zo ennomp, evel eun hadenn guzet, a dle en em zigeri ha bleunia edoug an holl-vikoaz. « **Beva ran, pe gentoc'h n'eo ket me a vev, eme Sant Paol, met ar C'hrist a vev ennoun** ». Slerijennet gant ar feiz, harpet gant an esperans, bez hon eus, en hor c'halonou, karantez Doue. Bugale Doue, dre wir-vadelezh, e reomp, gant hor breudeur, korf misterius ar C'hrist, a dle kreski betek e eil donedigez, pa zeuio an Aotrou da varn ar re veo hag ar re varo.

Ar vuhez a c'hras-se a zigor an hent d'ar vuhez peurbadus. N'eo ket hepken hon ene eo a vevo e Doue, met hor c'horfou a zavo, o-unan, glorius, a varo da veo. Ar wirionez-se a embann ar Gredo, pa ra d'eomp lavaret « **Gortoz a ran resureksion ar re varo** ».

Sant Paol a zo souezet, o defe kristenien Korinth douetans war ar wirionez-se eus ar feiz : « **Pa z'eo gwir e prezeger eo ar C'hrist savet a varo da veo, penaos e c'hell hiniennou ac'hanoc'h diskleria n'ez eus ket a resureksion a re varo ? Evel ma vev an holl e Adam, evel-se an holl a as-vevo er C'hrist...** »

— Hor re varo a as-vevo en o feiz gant ar C'hrist, en o c'horf hag en o ene. Sklerijenn Pask a lugern war hor beziou. Teurel a ra war mister ken trubuilhus ar vuhez da zont eur sklerder, ha n'eo-ket hepken hervez ar pezh a blij d'hor c'halon, met ar sked gwirion eus gloar ar C'hrist.

Ni hag a zalc'h ken birvidik devosion an anaon ne lezomp ket hor feiz da baouraat ha da zont da veza eun treuzkredenn bennak er bed all. Ra zeuio bommoù kan ar Gredo, bep sul, da zigas sonj d'eomp eus hon esperans divrall : « **Gortoz a ran resureksion ar re varo ha buhez ar c'hantved da zont...** »

(Tennet eus Lizer a Bastor an Ao. N' Eskob Fauvel.)

KAONW

HOR brezoneg a zo e kaoñv adarre. Nebeut war-lerc'h Paotr Treouere, TANGI MALMANCHE a zo aet d'an anaon. An ao. Cong a oa brudet gant ar bobl, ano Malmanche a oa anavezet etouez an dud desket, nebeut anavezet avat, rak n'edo ket o chom e Breiz ha ne zaremprede ket nemeur a dud. Plabennegiz koz o deus marteze sonj eus ar paotrig, a veze, ouspenn tri ugent vloaz a zo, e maner ar Rest o tremen e vakansou.

E dad a oa Komiser war vor pa voe ganet Tangi e Sant Omer, war laezhio Bro C'hall, d'ar 7 a viz Gwengolo 1875. Brestiz oa e dud. Brestad e teuas Tangi da veza ez-yaouankik. Skoliet e voe e Brest. Da vaner ar Rest, e Loc-Maria al Lann, tost da Blabenneg, hag a oa perc'hennet gant e familh, ez ae Tangi, da beb ehan-skol. D'ar mare-se, ne veze ket, a gredan, kalz a c'hallig gant tud ar c'harter. Skrivet en deus e-unan ar blijadur en deveze o selaou tiegez ar Goanted, a zalc'he milin ar Rest, o komz outan e brezoneg.

Goude ober e studi uhel, e Roazon, Tangi a yeas da jom da Bariz ha tro-war-dro. Karantez ar brezoneg a oa peget doun ennan. Ne ehano ket betek e varo d'ober enor d'ar yez.

Adalek an 20 a viz Here 1898 eman krog er bluenn. Er gelaouenn *Hermine* e kaver gwerzioù savet gantan. Ne skriv ket alies; met pep tra savet gantan a zo kempenn, ken e kenver an danvez, ken e kenver ar brezoneg.

Epad daou vloaz e bleuenn a jom skornet. E 1900, en « *Hermine* » adarre, Malmanche a lakâ moula « *Marvailh an Ene Naonek* » eur gontadenn rimet da lakaat al lenner da grena ha da gonforti. Eul leonard yaouank, marvet trumm, hep beza e stad a c'hras, a deu war an douar, noz an Holl-sent da c'houlenn pardon digant e vamm, rak ret eo e gaout araok kaout pardon Doue. Galleg a oa e kenver ar brezoneg.

Daoust ha sonj o deus Loc-Mariaiz beza gwelet displega ar pezh c'hoari trubuilhus-se, er Rest, e 1901, da zeiz gouel an Holl-sent. Mari Rouz a oa ar Vamm, Urien Coant, an Ankou (ha beo int c'hoaz?) ha Tangi ar paotr yaouank.

Eul levrig a voe graet gant ar pezh c'hoari-se, e 1904, e ano: *Marvailh an ene naonek*, marvailh dramatik, rimadellet e diou nozvez — Chartres — Imprimerie Garnier in 16 — 60 p. Eur vouladur all a zo e ano: « *Le conte de l'âme qui a faim* », Texte breton (dialecte du pays de Léon, accompagné d'une traduction française). Paris, Edition de *Spered ar Vro*, 4, rue Léopold Robert — 1904 — in-16, 57 p.

Spered ar Vro a oa eur gazetenn vizek, savet gant Malmanche, da viz Eost 1903. Ne badas, allaz, nemet pevar miz. Eur gazetenn rouez kenan da gaout, enni gwerzioù savet gant Tangi.

« *Le conte de l'âme qui a faim* » a voe c'hoariet, e Paris, war leurenn-c'hoari an Athénée St-Germain. Meulet dreist e voe Malmanche. Gaston Ernault, rener ar Studierien vreton Pariz, a oa ar paotr yaouank. Kontet en deus war *Buhez Breiz* 1924 — n 47 — petra oa bet an dervez c'hoari-se, e Pariz.

Ernault a aozas *Geriadur ar Jabadao* evit e gamaladed, Malmanche, hen, a gentelias Bretoned Pariz war ar brezoneg epad tri bloaz.

E genteliou a gaver en eul levr: « *Le Memento du Bretonnant* » (1), 77 pajenn d'ezan. Paris, « *La Bretagne* », 40, rue du Cherche-Midi, 1907.)

Peseurt micher den a rae Malmanche d'ar mare-se? War roll Koumananterien ar *Vro* 1904, e lennan « *avocat*, 4, rue Léopold Robert, Paris » ha war

roll barnerien kenstrivadegou ar Jabadao. N'ouzon ket ha distagellet mat ez oa Malmanche, dornet mat ez oa, da vihana. Ober a rae war-dro mekanikou ha diskleria ra edo mestr-gof e Courbevoie. Moula reas e-unan, e 1922, *Gurvan*, ar marc'heg estranjour: Mister gant Tangi Malmanche. Anken am ren, anken am doug. Ad. Le Goaziou, leorier e Kemper.

Hennez eo ano dianvaez al levr. Ano an diabarz a zoug: Mister ennan tri dervez hag ar beurbadelezh. E Kemper e ti Ad. Le Goaziou, leorier, 1923, in-12, gant prolog ha, war-lerc'h 142 pajenn ar pezh-c'hoari, eun Epilog hag an difaziou. Ha goudeze eman ar gerioù-man: graet penn da benn ganen Tangi Malmanche, mestr-gof e Kromhant, oajet a 47 vloaz. Koumanset ober ar waskel d'ar 7 a viz Gwengolo 1922.

Koumanset moula d'an 3 a viz Here 1922. Pourvouet d'ar 15 a viz Genver 1923, gant gras Doue.

War eur baperenn-embann, al Librairie Académique Perrin a ra da c'houlzout e vezo gallet prena adalek an 19 a viz Du 1926: « *Le théâtre breton de Tanguy Malmanche. La vie de Saladin qu'ils nommeront le fou, suivie du Conte de l'âme qui a faim*. — Version française avec une introduction de l'auteur. »

Eul levr a LXIV — 236 pajenn eo — hag o veza e toug « Imprimerie de Spered ar Vro, Courbevoie » e c'heller kredi eo bet moulet, evel Gurvan gant Malmanche e-unan.

War roll e oberou e kayomp goudeze: ar *Baganiz*, moulet war Gwalarn N. 34-35 — Gwengolo-Here 1931 — 122 p. — eur pezh c'hoari rimet e tri arvest. Displeget e voe e Plouescat. E galleg e voe c'hoariet e Paris, meur a dro ha bep tro e voe meulet. » « Un succès breton à Paris » a skrive O. M. war Breiz Atao, Mae 1931. — Eur pennad-skrid « Les Païens de Tanguy Malmanche au Théâtre de l'Œuvre » a voe embannet ive war *La Bretagne*, Juillet-Août 1931, n° 98.

Gurvan hag ar Baganiz a zo bet advoulet, e galleg gant al Librairie Celtique e 1945.

E 1932, Malmanche a embann eur werz: « *Difroeltadur Roazon* ».

Kemeret a rae e amzer gant e oberou. Gortoz a rankomp dek vloaz araok lenn eun oberenn all: *Gwreg an toer*, 1 arvest war SAV n° 24, Hanv 1942. Roet eo bet da glevet war Radio-Roazon da viz Gouere.

J. Ollivier en e « Catalogue de la chanson populaire breton » a lavar en deus Malmanche savet: « *An intanvez Arzur* ». Ne gredan ket e ve bet moulet.

J. Ollivier a ra eur roll eus pennadou-barn oberou Tangi Malmanche. Mene-gomp ouspenn: *Revue Celtique* XLI, p. 264. Consortium breton, 1927, n° 3, p. 222 — Arvor, n° 47-48 — Clocher-breton: *Echo* Octobre 1903. *La Bretagne*: 13 Décembre 1941. Tanguy Malmanche, le dramatique inconnu gant Y. Drezen. *Horizon*, n° 8, 1948. T. Malmanche gant Maodez Glanndour.

Diwar bluenn Malmanche eo deuet ive « *Kou le Corbeau* » ha « *La Tour de plomb* ». N'em eus ket a sonj beza bet o lennet. N'ouzon ket eta ma z'int oberou brezonek.

Daou bezig-c'hoari a zo bet kaset gantan da Radio-Kimerc'h da yeza diskleriet d'eomp eun dervez bennak.

Diweza obererinn Malmanche, bet moulet, e 1950, gant al Liamm eo An *Antekrist*, pezh-c'hoari, e tri arvest hag eur ragarvest.

Marvet eo d'an 20 a viz Meurzh, e hospital Beaujon, e Pariz. E relegou a zo bet douaret e Dives-sur-Mer (Calvados). Piou, er vro-se a oueze piou eo bet Malmanche?

Goudor en dije kavet e-harz chapel gaer Loc-Maria al Lann, tost d'ar Rest, e Plabenneg.

Doue da bardono d'an Anaon.

L. Lok.

Eul laeradenn iskis

TOMM ha digoumoul e oa an amzer hag a bep tu, dindan heol benniget an Aotrou Doue, e weled ar bleuniou en o c'haera hag e klevet al lapoused o c'houtellat hag o kana laouen. War-hed tregont pe zaou-ugent kammed diouz tal ti Yann Seitek, war eur c'hleuz ledan ha peuz-uhel, e oa eun tamm brao a wezenn-gerez enni, a-zribilh, melladou barbiolez ken druz ha ken kaer ma oa eun dudi sellout outo.

A-greiz mont d'e bred e chomas Yann harpet dirak e wezenn-gerez hag e teuas an dour en e c'henou : « N'int ket azo a-walc'h tre c'hoaz », emezañ outañ e-unan. « Hogen dao ' vo d'in beza aketus da deurel evez outo pe, a-hend-all, e vint laeret-diwar va c'houst. Dislañgourien a-walc'h ' zo dre aman ha ne vefent ket seizdaletoc'h evit karga o bouzellou ganto. N'eo ket hep digarez e oa deuet, dec'h diweza, da droidellat en dro d'ar park-mañ, Laouig Lagad-Karn ha Perig Lard-Ki, an daou lampon-se hag a blij gwelloc'h d'ezo beva diwar goust o nesa oc'h ober netra eget staga o c'horf d'al labour. Bezomp war evez, paotr-koz ! Bezomp war evez ! »

Ti Yann, eun ti bihan troet d'ar c'hreizteiz, daou brenestr hag eun nor warnañ hepken, a oa savet e-barz ar park e-lec'h m'edo ar wezenn-gerez. War bep prenestr e oa barinier houarn da virout ouz al laer da vont tre, rak eun den aonik ha douetik e oa Yann. Ouz unan eus taliou an ti edo ar c'hraou da lakaat ar gazez koz hag an teir buoc'h. Hogen abaoe ma oa deuet tomm an amzer, e veze laosket ar gazez er-mêz noz-deiz. « Kuit d'ezi da veza debret gant ar c'helien », evel ma lavare Yann.

Diouz en noz, p'edo o vont d'e wele, e teuas eur soñj da hemañ : « Pounnergleo oun eet abaoe eur pennad », emezañ da Gatell Beg-Treñk, e wreg, « ha ne glevfen ket al laer ma yafe d'ar c'higenez. C'houi, Katell, hoc'h eus eur skouarn dano ha ne vez ket kalz ar c'houssked ganeoc'h. Rak-se bezit war evez ha, ma tigouez d'eoc'h klevout eun trouz bennak, dihunit ac'hanoun kerkent hag ez in war-dro al laer ».

Sklêr e oa an noz rak kann-loar a oa. War-dro hanter-noz ec'h en em gavas Laouig Lagad-Karn ha Perig Lard-Ki, an daou lampon, e-tal ar wezenn-gerez, eur mell bec'h melchen ganto.

Ken didrouz hag an Ankou pa vez o vont da samma unan-bennak, a yeas Perig da loch ar c'harr e-lec'h ma kavas eur fun hir. Setu heñ goude o staga eur penne anezi ouz dorn klikek dor an ti, e-keit ha ma teue Laouig a-benn da dapout ar gazez koz dre he moue ha d'he digas gantañ d'e heul. Neuze e voe staget ar penn-all d'ar fun ouz lost hir ar gazez ha taolet ar bec'h melchen da houmañ da zibri. Ret eo lavarout e oa bet lakeet ar fun war stenn ha grêt kement tra ken didrouz ma ne glevas Katell na Yann seurt ebet.

Pa voe renket an traou ganto hervez o soñj, e pignas an daou lakepot er wezenn-gerez hag, hep aon neuze da veza klevet, e krogjont da derri bodou diouti ha da zibri barbiolez ar muia ma c'hellent...

Hogen, e-kreiz he c'houssk, e voe dihunit Katell gant eun trouz bennak. Dioustu e c'halvas Yann hag hemañ a lammas raktal er-mêz eus e wele da wiska e vragou. Hag heñ da doull ar c'heuneudeg da dapout eur mell keuneudenn gant ar soñj da vazata al laer ganti ma c'hellje tostaat outañ. Goude, ker prim ha tra, e redas da zibrenna an nor evit mont er porz. Met, tra sebezus ! kerkent ha ma voe gorzigoret, setu hi o vont en-dro d'he flas, ken herr

ha gant kement a drouz ma kredas da Yann e oa daou pe dri den er-mêz o chacha warni. « Petra 'n diaoul a c'hoarvez gant an nor-mañ ? », eme Yann, droug ruz ennañ. Klask a reas he digeri adarre, met en aner, rak ken lies gwech ha ma teue a-benn d'he digloza diouz he fostou e veze diframmet kerkent diouz e zaouarn ha sarret-klosoc'h eget biskoaz gant eun nerz iskis. « Ma ! », eme Yann, « n'eus ket da lavarout, sorset e rank beza an nor daonet-mañ ! »

O kredi e oa unan-bennak o chacha ouz he lost da virout outi da zibri he melchen, e ree bec'h ar gazez koz, evel just, da vont araok gant aon da goll ar pred mat a oa dirazi. Hogen ne gomprenas ar paour-kêz Yann petra a oa c'hoarvezet nemet pa yeas betek unan eus ar prenestrou ha pa welas na c'hellje ket mont er-mêz e-keit ha ma chomje eun tamm boued dirak e loen.

E-pad an amzer-se edo an daou lampon oc'h ober, da vat ha war o mad-ober, eur c'hofad kerez er wezenn hag o leunia o fanerou e-ser goapaat diwar goust Yann Seitek. A-rôk ma voe deuet ar mintin e oa bet skarzset ar wezennad barbiolez, e-keit ha m'edo Yann ha Katell, savet ivez eus he gwele, o charoñsa o dent gent an droug a oa enno hag o pilpasat dre an ti hep gellout mont er-mêz.

Pa voe deuet ar mintin ha debret he bec'h melchen gant ar gazez koz, e c'helljont digeri an nor hag e voent mantret o welout na chome kerezenn ebet koulz lavarout war-lerc'h al laer. Ha gwasas pezh ' zo ne ouient ket ouz piou ober klemm peogwir na ouient ket piou en devoa grêt an taol.

Yann ar Gwiader.



Le programme du Bleun-Brug de Châteaulin

Voici le programme des manifestations organisées les 31 Juillet, 1^{er} et 2 Août, dans le cadre des fêtes du Bleun-Brug.

Vendredi 31 Juillet. — A midi : ouverture du congrès : défilé de Kevrenn.

14 heures : conférences en breton.

21 heures : dans le cadre de la chapelle Notre-Dame, récital d'instruments à cordes ; œuvres de compositeurs bretons.

Samedi 1^{er} Août. — 9 heures et 14 h. 30 : conférences en français. Problèmes économiques et sociaux de la terre en Bretagne.

21 heures : veillée sur la colline du Château : la manécanterie de Sainte-Anne d'Auray ; la Pastorale de Poullaouen.

23 heures : procession aux lumières. Messe de minuit sur l'Aulne.

Dimanche 2 Août. — 8 h. 30 : les concours du Bleun-Brug.

10 h. 30 : grand-messe pontificale.

14 h. 30 : chants et danses de la terre au Château de Toul-ar-C'hoat.

Présentation scénique, 2.000 participants.

Cortège processionnel et bénédiction solennelle.

21 heures : C'hoariva Brezonek : théâtre breton.

Pour tous renseignements, s'adresser au comité local du Bleun-Brug, Mairie de Châteaulin.

Istor Salaun ar Foll

hag hini iliz ar Folgoet

Ar finvskeudennerez (cinéma) a zo eur benveg galloudüs bras en hon amzer-ni. Ni Kristenien ha Bretoned ouzpenn, n'hellomp ket chom hep tremen dioutan ma fell d'eomp skigna hor mennoziou ha dreist holl lakaat hor c'henvroiz da anaout ha da garout gwelloc'h o bro hag hec'h istor.

Dindan ano koz Breiz, « Brittia », eur strollad kenvroiz kalonek a zo aet waraok evit ober gant ar sinema eun abostolerez a bouez. Dija ar Bleun-Brug en deus graet e vruderez gant filmou war kendalc'hioù ar bloaveziou tremenet.

Met breman, eo istor Breiz a vevo dirak hon daoulagad. « *Le Mystère du Folgoët* » daoust d'e ano gallek, a zo eur film breizek-rik, nann hepken dre ma gont istor Salaun ar Foll hag hini iliz ar Folgoet, met dre ar spered, ha dre ma klever komz ha kana ennàn e brezoneg.

Kement-se a zo eun nevezenti ! Rak abaoe « Chanson d'Ar Mor », film graet e bloaz 1935, n'eus ket bet hini ebet oc'h ober gant hor yez. E « *Dieu a besoin des Hommes* » koulskoude, hon eus bet ar plijadur da glevet pedi ha kana e brezoneg.

« *Le Mystère du Folgoët* » a vo eun testeni eus ar pezh a c'hellomp ober war dachenn ar sinema : rei muioc'h a vuhez gwirion d'eur film a zell ouz Breiz en eur implij ar brezoneg. Ha war an hevelep tro, rei tu d'ar re n'int ket brezonegerien da gompren, en eur lakaat da heul eun disple gadenn e galleg.

Ar film hras-man, savet gant Herry Caouissin, eus ar Bleun-Brug, hag e vreudeur Ronan ha Perig (heman hag en deus graet dija « *Elorn* » ken plijus) a ziskouez d'eomp eur Salaun ha n'eo ket tamm ebet ar paourkaez-den diskiant a veze graet ar poltred anezan en istoriou, met eun den santel, izel a galon, hag a c'houzanv o welet ar fae graet gant tud e amzer war ar Werc'hez Vari. Hogen, goude e waro, warlerc'h burzud al lilienn, an holl a roio testeni da santelezh Salaun en eur sevel war e vez an iliz kaer a anavezomp, dindan ano ar FOLGOET.

Ha setu ma teu da bardoni e tal Gwerc'hez Salaun ar Foll, duked Breiz, en o fenn Yann V, hag an dukezh Anna, d'o heul prinsed Breiz ha Bro C'hall.

Goude amzeriou skedus ar Folgoet, an dispac'h vras a zegas amzeriou tenval. Ar re C'hlas a ra o reuzioù er Folgoet. Skeudenn an Itron Varia a zo diframmet diouz krabanou an dispac'herien, ha e vez pedet dre guz. Epad an amzer-se, eur relijion nevez, savet gant an Dispac'h, hini an « *Déesse Raison* » a vez lidet er Folgoet. Met an trec'h a jom gant ar Werc'hez. Echu an Dispac'h, e tistro d'hec'h iliz, met an hini a prenas ar Folgoet, Anquetil, a glask gwerza ar mein, ha diskar an iliz kaer-se da viken. Neuze daouzek den a rakpren ar Folgoet. Hepdo, e voe echu gant unan eus pec'herinajou brudeta hor Breiz. Pebez anaoude gez e tleomp-ni d'an daouzek leonad-se. Er film n'int ket ankoù-nac'haet hag anvet int o zaouzek.

« *Le Mystère du Folgoët* » a echu gant kurunedigez an Itron Varia hag ar Pardon bras, heuliet gant kantig *Patronez douz*, hag ar c'hleier.

Tro hon devezo da gomz c'hoaz eus film-se p'hon devezo e welet.

D'an 21 a viz Ebrel e vo diskouezet evit ar wech kenta e Brest, dindan pennrenerezh an Aotrou Fauvel, eskop Kemper ha Leon.

Da c'hortoz meuleudi d'ar parrezioù o deus kenlabouret er film, evel Plounour-Trez, Goulven, Plouzeniel, Landivisio, Pleyber-Krist, Gwipavas, ar Folgoet, Lannilis ha Brest, hep ankounac'haat menec'h Kerbeneat-Landevennec.

Bretoned Pariz

KEVREDIGEZHIOU Bretoned 'zo e Pariz a zo brudet evit al labour mat a reont.

Ar gevredigez « L'ENTRAÏDE BRETONNE » he deus prenet eur c'has-tell hag eun dachenn vat a zouar, e Yverres, evit sevel tiez marc'had-mat evit Bretoned hep lojeiz pe lojet fall. En doare-se, a-drugarez da harp kenvroiz kalonek ha brokus, ha d'ar skoazelloù-arc'hant a vez roet d'ar re a sav tiez, eun nebeudig mat a Vretoned aet da Bariz a c'hell, hep beza pinvidien, kaout eun ti a-zoare evit o familh. Ouspenn-se, e vezint eno eun toullad kenvroiz bodet er memes kêriadenn, ha moarvat e vezo blaz ar vro e « Keranna » nevez.

LA TERRE BRETONNE — DOUAR BREIZH, a zo kazetenn an Ao. Gautier, aluzenner Bretoned Pariz ha tro-war-dro. Enni e kaver kelou diwar-benn kement tra a sell ouz Breiz, diwar-benn buhez hag oberou Bretoned Pariz, diwar-benn an darvoudou degouezet e Breiz. Pennadou-skrid e brezoneg a vez embannet bep taol, kentelioù hag alioù evit ar re a zesk ar yez. Eur bajenn a zo bet nevez savet evit ar vugale, e galleg hag e brezoneg, o tenna da « O Lo Le » gwechall. Pep hini a c'hell kavout e zudi hag e vad o lenn ar gazetenn dalvoudus-se, ken Bretoned Breiz hag ar re zivroet.

Ouspenn rei kelou, DOUAR BREIZH a fell d'ezi ober bruderez evit ar vro, evit ar savadurioù hag ar c'hevredigezioù a laka da dalvezout pinvidigezioù Breiz. Emañ oc'h urzia, e Pariz, strolladoù tud kalonek evit ma vo efedus ar bruderez-se e-touez ar Vretoned divroet : « Ce que nous voulons créer, c'est une entreprise de « publicité », publicité désintéressée, publicité pour la Bretagne et pour toutes les œuvres, quelles qu'elles soient, qui servent la cause bretonne ».

Bruderez DOUAR BREIZH a gerz war eun dachenn ha gant eur spered naet hag eeun, hag a dlefe gounit asant ha skoazell an holl Vreiziz o deus eur galon vat en o c'hreiz.

Eur skouer eus berz ar gazetenn e Pariz : da geñver 53^{vet} pelerinaj Bretoned Pariz en iliz ar Galon-Zakr, e Montmartre, ez eus bet gwerzet e-tal dorioù an iliz, e teir eurvez, 1.200 niverenn eus DOUAR BREIZH.

SKOLIOU BREZONEG a zo anezo meur a hini e Pariz. E-touez ar re vrudeta emañ hini « *Ker Vreiz* », 43, rue Saint-Placide, Paris (6^e), ha hini an « *Association Philotechnique* », Lycée Condorcet, 11, rue de Rome.

Ne oa ket hor soñj, en nebeud linennou-mañ, lavarout pep tra diwar-benn Bretoned Pariz. C'hoant hon eus bet hepken da rei da anaout eun nebeud eus oberioù talvoudusa hor c'henvroiz divroet. Ha... da rei da soñjal d'hor c'henvroiz o chom er vro.

E-keit m'emañ Bretoned Pariz o vaga o spered hag o tomma o c'halon gant traou ar vro, e Breiz e vezer re allies o tiwizienna hag o tihencha ar Vretoned. Ha ret eo beza aet kuit eus ar vro evit hec'h anavezout hag he c'harout ?

Melar.

La Terre Bretonne, 44, rue des Volontaires, Paris (15^e). Eun nivereun bep pemtevez. Koumanat-bloaz : 400 lur. C.C.P. : Paris 8301-85.

"Ar Grasou pe ar Pedennou evit ar re Varo"

NE gaver mui da brena al leor a oa bet embannet dindan an ano-se, er bloaz 1945, gant hor mignon ha kenlabourer Yeun ar Gow.

O veza ma koustfe re-ger advoula al labour-se, en deus grêt an oberour e venoz da embann a-nevez eul lodenn anezañ e stumm eul leorig bihan ha marc'had mat. Kavet e vo el leorig eun darn vras eus ar pedennou kaer a zo el leor kenta ha pennadoù-all tennet eus ar Skritur Sakr, ofis an Anaon hag an oferenn interamant.

Ezomm bras a oa da gaout eur seurt dastumad pedennou pa ya bemdez war rouesaat niver ar re a oar lavarout gras gant ar re varo. Hiviziken ne vo ket ret gouzout an orezonou-se dindan eñvar. N'eus forz piou o lenn al leorig a-vouez uhel hag o lakaat an holl da bedi, a c'hello lavarout gras bewech pa vo noz-veilh gant eun den maro.

Setu amañ war-lerc'h eun nebeud gwerzennou tennet eus dornskrid al leorig hag o taolenni **DIUGAN EZEKIEL** :

Dorn Doue ' oa warnoun ha Spered Mestr ar Bed
Va heñchas d'eur stankenn hag a oa frank meurbet,
D'eun draonienn ankenius, divent, tenval ha du,
Goloet a eskern strewet holl a bep tu.
Grêt en deus d'in kerzet e-touez an eskern kras
Hag a-dreuz hag a-hed d'an dachenn don ha bras.
« Mab den », eme Doue, « daoust hag e teuy c'hoaz beo
« An eskern maro-mañ êt ken gwen hag ar rêo ? »
Ha respontet em eus d'an Doue leun a c'hloar :
« C'houi hepken, va Aotrou, c'houi hoc'h-unan her goar ».
— Sav, « emezañ neuze, « da brofedi hep nec'h.
« Embann a-vouez uhel, d'an eskern-mañ ken sec'h,
« E lakain-me enno spered hag e vevint
« Ha, dre nerz va c'homzou, goloet e vezint
« A groc'hen hag a gig buhezek, yac'h ha kreñv
« 'Vit ma ouezint ez oun an Doue ' zo en neñv ! »
Ha setu me em sao da brofedi kerkent...
Met, ' keit ha ma komzen el lec'h-se didrouz kent,
E savas eun tabac'h, eur safar souezus.
En dro d'in e sellis ; neuze, tra vuzudus !
E welis o finval an eskern eun pe gamm,
An eil ouz egile o tostaat bep eun tamm,
Hag, e pep relegenn, o klokeda pep mell.
Met ar burzud ken kaer ' voe echu a-barz pell
Rak warno ar c'hroc'hen, ar c'hig a oa kresket.
Mel a oa en eskern, met ne oa ket spered !
A-nevez e klevis ar Vouez Vras o sevel :
« Lavar d'ar Spered dont eus ar peder avel
« Ha c'houeza a-zevri war an holl gorfou-mañ
« Ma kavint buhez c'hoaz, ma advevint amañ ! »
Senti a ris raktal ouz ar gourc'hemenn meur.
Ha, neuze, ar Spered ' lakeas, war an eur,

Nerz en izili gwan, gwad tomm er c'horfou yen.
A oa c'hoaz astennet war c'horre 'n douar plên.
Hag ar c'horfou maro, en o sao o sevel,
' Reas eur mell arme betek deon an dremwel.
N'ouzon ket pet kant mil a oa anezo holl
O tont d'en em voda dirazoun en eur stroll...



REOLENNOU NEVEZ

E KENVER YUN AR GOMUNION

E penn kenta ar bloaz, Hon Tad Santel ar Pab en deus embannet reolennoù nevez e kenver yun ar gomunion.

Ar reolennoù-se a zo douget hiviziken evit ar bed holl, ha nann hepken evit eur vro pe eur rumm katoliked.

Setu aman, etouez ar reolennoù-se, ar re a zell ouz an dud fidel :

Reolenn I. — Lezenn ar yun e kenver ar gomunion n'eo ket chenchet evit ar re n'o deus digarez vat ebet. Ne c'hellont debri nag eva netra abaoe hanternoz, evel araok. Koulskoude, hag an dra-man a zo nevez : *Hiviziken* evit ar veleien koulz hag evit an dud fidel, *an dour naturel ne dorr ket ar yun e kenver ar gomunion.*

Reolenn II. — Ar re glanv, zoken ar re ne zalc'hont ket ar gwele, a c'hell, *war ali fut o c'hovesour*, kemeret eun dra bennak, dindan doare eun evaj pe eul louzou gwirion, met morse ne c'hellont kemeret evachou, a ve enno alkool.

Reolenn III. — An dud fidel, zoken ar re yac'h, ha n'eo ket posubl d'ezo, e feson ebet, tostaat war yun ouz an daol zantel abalamour da ziezamanchou bras, a c'hell, *war ali fur o c'hovesour*, ha keit ha ma pad an diezamanchou-se, kemeret eun dra bennak, dindan doare eun evaj, met morse n'eo aotreet kemeret eun evaj a ve ennan alkool. Ouspenn an evaj a dle beza kemeret eun eurhorolaj, da nebeuta, araok en em vaga eus Bara an Elez.

An diezamanchou a c'hell talvezout evit goulenn aotre da gemeret eun dra bennak, araok komunion, a zo *tri* seurt anezo : eul labour pounner da ober ; an eur diwezat a ranker gortoz abarz tostaat ouz an Daol Zantel ; eun hent hir ha pell diouz an iliz. (Daou gilometr da ober war an troad.)

An Tad Santel ar Pab a ro ali d'ar re a zo goest ha n'o deus rezoun vat ebet da jench, da heulia lezenn ar yun evel araok.

Ar re hepken a zo re zies d'ezo hen ober a c'hell profita ouz ar reolennoù nevez.

An iliz a zo eur vamm. En eur zouplaat lod eus al lezennoù bet savet ganti, ar pez a glask eo mad he bugale. En eur zouplaat lezenn ar yun araok ar gomunion, ar pez a glask eo rei tro hag aesamant d'ezo da dostaat aliesoc'h ouz an Daol Zantel.

Ar c'hristen, hirio, evit chom beo ha start en e feiz en deus ezomm d'en em vaga alies eus bara an nenv.

ANAOUT HOR YEZ

Ar brezoneg a zo eur yez pinvidik. Ar Vretoned eo her gra paour, re alies. Ne lennont ket a-walc'h a vrezoneg ; ha koulskoude nag a skridoù kaer a vez embannet en hor yez koz, ha pa ne ne nemet er gelaouenn « Bleun-Brug » hag a dlefe mont e pep ti. Kalz a Vretoned n'o deus ket baleet a-walc'h dre o Bro ; desket o dije eur bern gerioù brezonek n'int ket anavezet ganto hag a zo en implij en andreajou all. Marteze, hep mont eus ar gêr n'o deus ket eveziet a-walc'h ouz ar gerioù brezonek a glevont bemdez ha n'ez eont ket en o spered.

Setu ma vezont lakaet nec'het pa rankont displega eun dra bennak e brezoneg hag e vezont klevet o tistripa eun trefodaj euzus ne vez na galleg, na brezoneg. « Cinquante ans am bo da viz juillet ; poan am eus dans les reïns ; bet oun o kaout ar medisin hag oun dégu, le foie ivez a zo klanv... » Setu aze peseurt baragwinaj a zo gant kalz a... vrezonegerien ! Eun druez ! Ne gavont ket souezus e rankfed deski ar galleg ha tremen bloavezioù ha bloavezioù er skolioù araok hen distaga a-zoare ; ar brezoneg avat a dlefe dont e-unan, hep hen deski, koulz lavaret dre natur !

N'eman ket an traou evel-se, tud keiz. War an douar-man, n'eus netra nemet dre boan ha dre labour, zoken ar brezoneg. Evel ar yesou all, ar brezoneg a zo da veza desket ha studiet araok beza gouezet.

*« Pa 'z'eus diou yez e Breiz-Izel
Evit ma 'z'ay mat an traou
E vo ret d'eomp en eur zevel
O deski, ervat, o diou.*

*Ha ma rankit komz e galleg
Na gomzit ket hint plat
Ha pa gomzoc'h e brezoneg
Distagit brezoneg mat... »*



Kuzulioù ar medesin

Daou ugent vloaz a zo, Feiz ha Breiz a voulc'he pennadoù Kuzulioù roet gant eur medesin diwar ar miz d'e lennerien. Epad bloavezioù e vezent kavet da lenn, bep miz, er gelaouenn. Ehana reas abalamour d'an nebeut a amzer-vak a gave diwar e labour-vicher. Ne ehanas ket koulskoude da glask ober vad d'e genvroiz, d'ar re yaouank dreist-holl, ha mont a rae, beb an amzer, eus an eil parrez d'eben da brezeg d'ezo. Goulennet hon eus digantan renka e brezegennou. Ha setu m'hon eus ar blijadur da lakaat dirazoc'h eur pennad anezo aman.

Ar brezegenn a gavoc'h aman a zo bet savet epad ar brezel diweza hag a dalvezo diwezatoc'h d'an istorourien da liva stad hor bro, epad m'edomp « dindan seulioù pounner an estren ». Nag a wirionezioù, gwir atao evit an amzer-vreman a gaver enno. Gwelit kentoc'h.

S'ELHAQUIT-TA ! YAOUANKIZOU BREIZ

FREUZ ha reuz a zo er bed-holl. Tud a bep oad hag a bep stad a vez lazeta viladout, bemdez. Kêrioù a vez dismantret. N'eus familh dic'hlaç'har ebet koulz lavaret. Trubuilhet ar sperejou ; kalz eneoù a zo en argoll. Hol lod a dourmañchoù hon eus, ni Breiziz.

Ar brezel a zo penn kaoz ? Ya. Hogen, ne vefe ket bet a vrezel ma vefe bet sturiet mat ar pobloù. Ken gwir all eo n'o deus ket an dud sentet, araok ar brezel, ouz an alioù fur a veze roet d'ezo. Ar bed a gerze a-dreuz. Met ar brezel ne bado ket atao ha goudeze e reno ar peoc'h adarre.

Ar pezh a zo bet graet fall en amzer dremenet a zo da veza diskaret pe wellaet an amzer da zont, da veza dreset gwelloc'h. Ma ne vez ket graet al labour-se, e savo brezel adarre. An amzer da zont eo lod ar yaouankizou. Hervez a raint eta, e kavint pe an eürusted pe eur vuhez tenn.

Ya ! mes ha gouest int da cheñch penn d'ar vaz ?

I. — Fiziñs er yaouankizou.

Ar yaouankizou a responto : « Fiziout a c'hellit warnomp ! » Hag, e gwirionez, pa welan penaos en em gompport ar rummadoù tud en oad e taolan va daoulagad war ar yaouankizou a zo o sevel hag e lavaran ennoun va-unan : « Ma karfent ! Pep tra o deus evit stourm ha trec'hi : nerz ha yec'hed o c'horf, sperejou lemm ha digor alies, o veza m'int bet hiroc'h er skol eget o zud. Kentelioù ar brezel ivez, diou vrezel an eil warlerc'h eben zoken, gouest da zigeri d'ezo o daoulagad, da ziskouez d'ezo sklaer pere eo an heñchoù n'eo ket mat darempred. Ar re goz a wel ivez, lod anezo, met n'int ket evit dirollec'hia mui, derc'hel a reont gant o hent, pounner o spered awechou hag e lavaront : ar re yaouank, ma karont a jeñcho, me a zo tremenet va amzer. War bep tachen pe dost eo gwir ar wirionez-se : war dachenn ar bolitikerezh fall o lakaat freuz ha sinkan etouez an dud, pep hini o klask e interest e-unan hag ar pennou brasa ar c'hablusa alies : war dachenn ar vicher, pa ne felle ket d'an dud diwar ar maez en em unani start e emglevioù kreñv, gwelloc'h ganto, war o meno, ober o fenn o-unan ha koueza en eur stad truezus a skarze bep bloaz eus hor parkeier yaouankizou a vernioù, aon ganto o lakaat o choug dindan samm re bounner o zud ; war dachenn ar familh pa zeue da veza stankoc'h stanka bemdez ar c'havellou goullo zoken war ar maez ha pa zinerze evel-se ar Vro ; war dachenn ar feiz ivez, hag e weled parrezioù, ar feiz enno o vont d'ar bern, ha da heul an onestiz e pep doare.

Na kaer eo al labour fiziñs er yaouankizou. Endro d'ezo n'eus nemet dismantrou : d'ezo e vezo da sevel eur bed nevez. Hag e plij d'in gwelout daoulagad ar baotred yaouank o leuc'hi : enno e lennan eur mennad uhel : rei hag en em rei evit silvidigez o micher hag o bro. Ar re wella eo ar re-se hag evito dreist-holl eo em eus skrivet al levrig-mañ, evit o diarbenn ouz kement e c'hellfe feurel d'an traon o mennad sakr, ouz kement a c'hellfe ober anezo, int-i gwazed a-zoare, gwazed didalvez.

✱

II. — Rebec'hou d'ar yaouankizou.

Da stourm kalet o devezo ar re a gemero ar penn, rak kalz tud a gred n'eo ket direbec'h awalc'h ar yaouankizou. Gwall rebec'hou a vez graet d'ezo er c'hazetennou, er c'helaouennou. O c'hlevout a reer en ilizoù, kant ha kant tra a weler bemdez hag a ro da gredi n'eo ket goullo ar rebec'hou-se.

Testeniou.

Paotred yaouank an Y.K.A.M. a zisklerie, o unan, e bodadeg ar Folgoad, da lun ar Pantekost 1943, ez eus eun tamm mat a gempenn da ober evit silvidigez ar vro.

« Skriva ra pep den a skiant hag a feiz, a lavare n'ez eus ket pell, *Fanch Kouer* da lennerien ar *C'hourrier*. Ha koulskoude, emezan, lod a zo ha ne welont ket c'hoaz sklêr hag a ra skouarn vouzar. Eur vez eo gwelout ar yaoukizou er foarioù, er pardonioù ! a dra-sur n'eo ket yaouankizou diskiant ha dister evel-se a adsavo ar Frans. Tremenn poent eo, emezan c'hoaz, da bep den a skiant enebi ha d'an tadou ha d'ar mammou diarbenn o yaouankizou pennfollet. Eur rann-galon eo. »

Kement-mañ a zo moulet war « *Ar Vuhez Kristen* ».

« Distaga o deus graet ar Vretoned yaouank diouz ar re goz. Ober o deus graet anezo diavêzidi en o bro. Hefivel e kavan hon tud yaouank hizio ouz skourrou diframmet diouz o gwezenn, ha drouk-staget ouz eur wezenn all ha n'eo ket mamm d'ezo. N'eo mui Breiz a zo o rei seo d'ezo. Eur vagadurez all eo a gavont bremañ, dishenvel-tre diouz an hini vreizek. Ar frouez a zougint ne c'hell ket beza ar memez blaz ganto. Gwelout a reomp a-vremañ petra int : Begou drouk-livet, gwiskamantoù divodest, sakañvadurez, dizonestiz, diegi, aoun rak ar vuhez, kant si all a ziskar bemdez muioc'h ar Vretoned ; ne gomprenont mui kerder hep par ar vertuzioù hag an nerzioù-ene o doa o savet ken uhel.

Henvel, e kavan hon tud yaouank hirio ouz bugale emzivad. Ar reman n'eman mui lagad o zad o para warno, na kalon o mamm o tomm a hini.

Sevel a reont evel ma karont : gwall skoueriet a gleiz hag a zehou, den d'o hench.

Daoust ha n'eo ket ivez stad hor yaouankizou ? Kerent o deus hag eo evel n'o defe ket !! Ne reont netra diouto ! Ne heuliont ket o skouerioù, ne valeont ket war o roudou, fae e vefe ganto, hag evel bugale digeren, emaint prest da heulia kement giz fall a zeuio a-ziavaez. Ma teuje ar re goz war an douar, p'emañ an estrenn mestr war Vreiz, pa 'zeus kement a anken etouez an dud, p'amañ, a viliadou, bugale Vreiz en harlu o c'houzañv poanioù en o c'horf hag en o c'halon, spontet e vijent o welout pegement a arc'hant a vez lakaet etre daouarn ar re yaouank hag an implij direiz a reont anezañ, o welout war eun taol kilhou kement a vil lurioù hag o deus gounezet o unan epad bloavezioù labour. Ya, spontet e vijent o welout ar re yaouank en tavarnioù daoust pegen rouez ha pegen ker eo an évachou, o klévout e rank an arche-rien mont da lakaat urz er salioù-dañs pa 'z eus kement a dud e kañv, o welout da sul, kement a dud o c'haloupat war veloioù, pell eus o farrez, evit en em rei d'an ebatou.

Ha ma velfent ar merc'hed yaouank, kastolorennet o fennou gant tokou giz-kêr, d'ezo aesoc'h dre-se beza dianavezet pell diouz o zi, o tispign arc'hant bras da brena traou lipous, dourioù c'houez-vat, livet o muzelloù ha bleudet o diou-jod ; rodellet ha dirodellet o bleo ha n'eo ket evit eur bennoz Doue, eo ! Ha ne gav ket d'eoc'h e skrijfent ! Hag an traou-ze e Breiz ! »

Tabutomp eun tammig.

« Brao, a lavaro, ar re yaouank. An dra-ze a wel pep-hini bemdez. Gwir o rebechoù. Met, ha ni hepken a zo da veza sammet ganto ?

Va santimant eo n'ez eus den ebet didamall. Ar re o doa gounezet ar brezel all a gave d'ezo beza bet graet a-walc'h o savetei ar vro. Ar bolitikerien a vicher a lavaras d'ezo : « diskuizit bremañ, setu metalennou d'eoc'h da c'hoariellat, hag eur gwennegig bennak da gaout butun ha « pinard », grit eur

c'houisk war al lore. E keit-se ni a renko pep tra hag e c'hounezimp d'eoc'h eürusted ar peoc'h »... Ha padal o deus digaset d'eomp ar brezel hag an dizurz epad ugent vloaz. Hor yaouankizou a zo hizio heritourien an dizurz-se. Hanter kant vloaz ne vezo ket a re da zigas kemm.

Kentoc'h eget bernia rebechoù ez eo gwelloc'h klask petra a ve mat da ober evit ma vo gwelloc'h an traou en amzer da zont.

Eun dra a zo anat d'an holl : ar maezioù o deus saveteet ar bed epad ar brezel. Hepdo kalz tud a vefe bet marvet gant an naon ha, just eo eta, o dije gounezet arc'hant ha kalz zoken. Beva o deus graet ar gouerien didrousoc'h eget tud kêr. An douar a zo bet atao, abaoe m'emañ ar bed o trei war e ahel, mamm vagerez ar c'horfoù hag eienenn ar peoc'h. An douar hag ar mor ive. Diwar poania, evel just. Breiz a vezo eur vro eürus gant ma chomo ar Vretoned eur ouenn a gouerien hag a vartoloded.

Hogen, daoust pegen pinvidik e vezo eur vro hag ar ouenn a zo o veva warni, pinvidigez ar spered hag an ene eo an dalvoudusa. Hounnez eo diazez eur ouenn. N'oun na beleg, na manac'h ha koulskoude ne gredan ket e chomfe an diazez start war he bloum hep relijion, hep ar relijion gristen. Evit pep den, pep familh, pep bro he deus kentelioù hag a zigasfe eürusted ma vefe sentet outo. Tud a zo hag a zo o dever deski d'eoc'h ar c'hentelioù-se : an tad, ar vamm, ar mestr-skol, ar beleg. D'ezo kaout soursi eus sperejoù hag eneou ar vugale, ha re ar yaouankizou betek m'o deus paket ar re-mañ oad ar furnez.

Met, n'eo ket awalc'h kaout soursi eus yec'hed an ene rak ar c'horf ivez a rank beza yaoc'h. Ar c'horf hag an ene a zo gevell. Ha setu eun dra all a renkan poueza warni : Ne deus ket dreist d'ar maezioù evit d'ar c'horfoù chom yaoc'h, ar maezioù hag ar mor.

« Aezamant beva, sioulder ar vuhez, yec'hed ar c'horf hag an ene, kan al laboused, kaerder ha c'houez-vat ar bleuñioù en hañv ! Klevet hon eus an diskan-se, a lavaro hor yaouankizou. Hini ar goañv avat gant e avelioù kriz, e zour pemdeziek hag e bri ne glever ket kana. Ankounac'haat a rit ez omp tud evel ar re all hag e plije deomp kaout da laouenaat hor buhez tiez sklaer, elektrisite e pep korn eus hon ti, dour direbech, an T.S.F., aezamañchoù a bep seurt. N'omp ket lipousoc'h eget an dud all war an traou-se, nebeutoc'h n'omp ket kennebeut. »

Re wir eo. He setu labour evit hoc'h emglevioù-micher goude ar brezel Arabat ankounac'haat ken-nebeut e plij deomp pep tra hag a vag ar spered hag a zidu hor buhez. Plijout a rafe d'eomp beza desket war bep tra hag a wellafe hor micher. Lakit ac'hanomp da anaout an nevezentioù. Deskit d'ar merc'hed kement tra vat da veza graet wardro an ti. An traou mat, an traou kaer a blij d'eomp. Petra zo bet graet betek-hen evidomp, evit hor sikour da gaout an holl draou-se hag a lakafe buhez ar maezioù da veza laouenoc'h ?

« Arc'hant bras a c'hounezomp bremañ ? Ya ; diwar an dienez hag ar brezel. Ar re-mañ a ehano. Avansetoc'h kaout paper pa n'omp ket evit prena an distera benveg, netra koulz lavaret.

« Chom war ar maez beza kouer ? ya c'hoaz ! Labourat ? Betek c'houezi ? Ya ha ya ! Mes yaouank omp, hag e rebecher d'eomp hon ebatou. Da be oad e kemerimp ebat ma n'eo ket e-keit ha ma vimp yaouank ? N'eo ket an holl ebatou a rebecher d'eoc'h. Arabat evelato beza troet evel ma vezer hizio da gemeret preder gant ar sportoù dreist an traou all. Ebatou, c'hoarioù, a zo ret d'ar yaouankizou. Hervez kentelioù re a dud e c'hellfed kredi n'eo an den nemet eskern, kig ha kroc'hen hag e ve an dre reta kaout soursi gant buhez ar c'horf. « L'education sportive de la Jeunesse », setu ar bater nevez.

(Da genden 'hel.)

Abadenn-studi ar Bleun-Brug e Kastell-Paol

I ABOUT ar Bleun-Brug n'eo ket nemetken sevel bep bloaz eur c'hendalc'h hag a jach kalz tud da zelaou sonerien pe da estlammi dirak kaerder dilhadou Breiz. Dounoc'h e karfe mont, betek spered ha kalon ar yaouankizou evit o dihuna d'ar pezh a ra m'eo Breiz eur vro disheñvel eus ar broioù all, gant he finvizezioù speredel hag arzel d'ezi hec'h unan. Al labour-ze n'hell beza graet nemet en abadennou-studi.

Goude Kemper ha Brest, setu tro Kastell er bloavezh-mañ, eus an 9 d'an 12 a viz Ebrel.

Plijadurus ha frouezus eo bet ar studiadennoù ha n'hellomp nemet rei meuleud d'ar re o deus savet an dervezioù-studi-ze.

An Ao. Floc'h, aluzenner e Skol Sant-Per et Sant-Brieg eo en deus kemeret ar garg pounnera. N'en deus bet distarnet kouls lavaret epad ar pevar dervez. Displeget en deus dirazomp kudenn ar c'hontadennoù : petra eo eur gontadenn ? e peseurt levrioù e kavomp ar c'hontadennoù-bet dastumet war maezioù Breiz-Izel ; talvoudegezh ar c'hontadennoù evit diorren ar spered ; penaos konta ha sevel kontadennoù. Meur a rummad kontadennoù a zo, lod savet war ar falsdoueoniezh (mythologie), lod all war an digouezadou fromus pe fentus (aventures), lod all war ar maro pe war buhez ar zent. Evit ma vefe sklaeroc'h e gelenadurezh, an Ao. Floc'h a lennas d'eomp meur a gontadenn en eur ziskouez pinvidigezh pep hini. Da heul setu kontadennoù a vro-Iwerzôn. E lennegezh Breiz ar c'hontadennoù a gemer eur plas frank, e lennegezh ar Gelted eo an hevelep tra.

Pladennoù (disques) a roas d'eomp da glevet ivez a bep seurt sonioù, kouls eus Breiz evel eus ar broioù keltiek all.

Eur furcher eo ivez an Ao. Floc'h ha dastumet en deus dija eur bern sonioù koz e Bro-Dreger, deski a ra d'eomp unanoù anezo.

Ar beilhadegou a vezo ano enno eus ar relijion gristen e Breiz. Setu da genta bloavezioù kenta, kontet d'eomp gant an Ao. Falc'hun, kelenner e Skol-veur Roazon. Sklaeroc'h-sklaera ez a an istor goz. Da gredi eo n'eo ket deuet hor zent koz er memes bagou evel ar Vretoned o tilezel Breiz-Veur. Ar re-mañ a deus eus reter Breiz-Veur, diwar-dro Londres, e-keit ha m'en em denne lod all e bro-Gembre hag e Kerne-Veur. Diwezataoc'h, menec'h bro-Gembre o sonjal en o c'henvroiz aet da Vreiz-Vihan hep o beleien a zeuas war o zikour ha setu Sant Budoc, Sant Samson, Sant Brieg o touara d'o zro. Betek an X^{vet} kantved beleien hor bro eo bet menec'h hor manatioù.

An Ao. Floc'h a gomz diwar-benn Breiz en amzer Sant Erwan.

Gant an Ao. Bihan emaeomp en amzer Mikael an Nobletz hag an Tad Maner. Eur wech muioù e vo roet lusk d'ar feiz kristen e Breiz, hag al lusk-ze a bad c'hoaz en hon amzer.

An Ao. Fave, person Kastell a lavar d'eomp war be du e kerz ar Bleun-Brug. Poania da ziorren ar Vretoned war bep tachenn en eur rei eur vuhez nevez da gement a zo e herez hon tadou, diorren ar Vretoned n'eo ket avat evit lakaat disparti etrezo ha tud ar broioù all, met er c'hontrol evit ma c'hell beza eun eskemm frouezus etre an holl broioù, pep hini o rei hag o kemer. Eun delenn milgordennek en deus fiziet Doue e mab den evit meuli e grouer hag evit en em zidui e-unan ; gant pep pobl ez eus eur gordenn ; arabat terri kordenn ebet, paouraat e vefe herez mab den. Mouez Breiz a zo eur gordenn eus an delenn, eur gordennig zister marteze e meulgan ar bed, eur gordennig eo atao.

An Ao. Guicher, eus Pariz, desket bras war folklór eur bern a vroioù, desket bras dreist-holl war an dansou-pobl a gomz d'eomp diwar ar pezh a oar, eul lodenn eus ar pezh a oar, rak ne vefe fin ebet d'ezañ hag eun dudi eo e glevet. Diou vouez a dleomp da zelaou, emezañ : mouez ar bed, mouez ar broioù all o tont davedomp, greomp hor mad eus kement tra talvoudus ijinet gant ar re all ; mouez hor gwad d'eomp hon unan, mouez hag a zeu eus pellder hon istor hag eus dounder hor gouenn ; ni ivez hon eus da rei d'ar pobloù all, ha dreist-holl war dachenn ar zonerezh, war dachenn ar sonioù. N'eo ket lavaret e ve pobl ebet ken pinvidik, ken ijinus ha ni war an dachenn-ze.

Gaidig Koadou, eus Lokornan, a zesko d'hon yaouankizou dañsal epad ar mareoù vak.

Ha setu eun dampskeud eus ar pezh eo bet hon abadenn-studi. Abadennoù evel-se ma vefent stankoc'h hag heuliet mat gant ar yaouankizou a c'hellfe marteze rei d'hor spered ha d'hor c'halon troioù nevez ha koz war eun dro, troioù koz nevesaet, hag a c'hellfe yac'haat an aer a ev hon amzer, war dachenn an arzou poblek, yaouankizou hor bro.

Eno Edon.



KELEIER

MISTER AR FOLLGOAD

D'an 21 a viz Ebrel e vo diskouezet, evit ar wech kenta, e Brest, ar film « *Mystère du Folgoët* ». Kalz kaoz a zo bet dija war ar c'hazetennoù war ar « C'hourrier » dreist-holl, diwar-benn ar film-se. A-barz gouzout mat a-walc'h petra eo, e rankomp gortoz m'hon do her gwelet. Met gouzout a reomp dija ez eo eur film brazik a-walc'h, peogwir e pad eun eur. Gouzout a reomp dreist-holl ez eo ar film kenta a-bouez a vije bet savet en eun doare breizat ha gant Bretoned. Rak ar re o deus her savet kouls hag ar re o deus c'hoariet evit her sevel, a zo gwad breizat dindan o ivinoù. Ouspenn se an danvez-film a zo breizat, hag ar c'han breizat hag ar brezoneg o deus o lod e-barz ar film. Mall am eus d'her gwelout, ha c'houi ho peus ivez, emichans !

MAEN KENTA ABATI LANDEVENNEC

D'an dek a viz Mae e vo diazezet maen kenta ABATI nevez Landevenneg. Eun deiz bras e vo hennez e buhez Pobl ar Vretoned. Marteze an holl n'ana-vezont ket istor Abati Landevenneg. Met an holl a dle gouzout e voe unan eus an Abatioù kenta a voe diazezet gant menec'h hor gouenn p'o devoe treuzet ar mor evit sevel aman eur Vreiz nevez. Landevenneg en deus graet eur vad divent d'hon Tadou, ken evit ar pezh a sell ouz ar Feiz ken evit ar pezh a sell ouz traou ar spered. Holl eta da Landevenneg d'an 10 a viz Mae ! Ha ra zougo pep hini e vaen evit an Abati nevez !

SEIZVET KANTVED GINIVELEZ SANT ERWAN

D'ar 17 a viz Here 1253 e voe ganet, e Maner KERVARZIN, e Minic'h-Landreger ERWAN HELOURI, an hini a dle dont da veza Sant brasa ar Vretoned. Seiz kant vloaz a zo abaoe. An hini a anavez eun tamm bennak Istor BREIZ ne c'hell ket lavarout hon eus paeet c'hoaz hon dle e-kenver Sant ERWAN. Nebeutoc'h c'hoaz e c'heller lavarout e pedomp hag ec'h enoromp anezan kement ha ma vije hag en doare ma vije dleet !

HARPIT, BRUDIT « BLEUN-BRUG »

Bleun-Brug a zo eur gelaouenn gristen ha breizat. Stag eo ho kalon ouz ho feiz hag ouz ho prezoneg. Neuze, ho tever a zo harpa ha bruda *Bleun-Brug*.

Eur mor a gazetennou hag a gelaouennou gallek, mat pe fall, a vez skignet dre holl, hag a zo e riskl da veuzi spered hor Bro.

Eur son a glevit en-dro d'eoc'h : ar brezoneg en deus graet e amzer, ret eo d'ezañ leuskel e blas. Hag e sonjit marteze : eur gelaouenn vrezonek n'eo ket evit herzel ouz an avel a-vremañ, ouz tiz eun toullad kelaouennou gallek. N'eo ket gwir !

Ar c'helaouennou gallek n'int ket bet muioc'h goulennet gant ar vrezonegerien eget kelaouennou brezonek. Nemet, m'o deus gounezet tachenn, ez eo dre ar bruderez a zo bet graet vito.

Brudet mat, kelaouennou brezonek a rafe kement a berz e-touez ar vrezonegerien. Ha neuze e vefe tu da wellaat, da wellaat a-leiz, doare hor c'helaouenn.

Bleun-Brug a ra pezh a c'hell gant skoazell he gwella mignoned. Kalz gwelloc'h a raio, pa ouezo he holl lennerien pezh a c'hellont ober o-unan eus o zu.

En ho kalloud emañ, lennerien ger, ober eus *Bleun-Brug* eur goulouenn gaeroc'h, brasoc'h, brudetoc'h, kelaouenn vras hor Breiz kristen.

— En eur bae a poent ho koumanant. Kalz muioc'h a zispigner evit butun ha disterajou.

— En eur vruda ar gelaouenn, hag o klask d'ezi koumananterien nevez.

— En eur lakaat *Bleun-Brug* e gwerz, ma werzñ dija kelaouennou all. He flas a zo vihana e-touez ar c'helaouennou katolik all a vez gwerzet en hor parrezioù.

— En eur skriva pennadoù evit ar gelaouenn : kontadennoù, keleier eus pezh a dremen er vro ha dre ar bed, studiadennoù war gudennoù a bep seurt. E dek linenn e c'heller lavarout traou a-bouez ha plijus evit an holl. Ma n'eo'h ket evit skriva e brezoneg (met klaskit hen ober), e c'hellimp trei e brezoneg pennadoù a vo bet kaset deomp e galleg.

D'al labour, mignoned, evit ma kresko hor c'helaouenn, evit ma yelo war gaeraat, evit ma vrasaio niver he lennerien. Etre ho taouarn emañ buhez *Bleun-Brug*.



SKIANT AL LOENED

Eun abardaevez e oan aet gant va marc'h-houarn d'ober eun droig war hentou ar maez, da ziskuiza ha da anala frondou c'hwek an nevez-hañv. Edon o vont da dremen dre gichen eur gêriadenn a oa tostik d'an hent-bras, pa 'm boe tro da welout eun dra souezus kenañ.

E-tal porz eun tiegez, eur vandennad yer a oa o turiellat e-kreiz an hent. Eur c'harr-tan a zegouezas a daol-prim gant boud ha tiz. Ar yer, spontet, a lammas hag a nijas a bep tu d'an hent. Unan anezo, siwaz d'ezi, n'he devoe ket amzer da dec'hout, hag e voe flastret naet, hep eur c'hri, dindan rod ar c'harr.

Neuze e klevis eur youc'hadenn skrijus o tont eus tu ar porz. Hag e welis eur c'hilhog o redek buana ma c'helle etrezek an hent, davet ar yar mac'hagnet. Ar c'hilhog a sellas ouz e genseurtez, ha raktal, o kompren ar gwalleur, hag o sevel e benn, e laoskas eur youc'hadenn skistrus, ha poanias da glevout, a seurt n'am boa bet tro da glevout morse. Eur youc'hadenn hag a oa anat e oa enni war eun dro, glac'har, kounnar ha dizesper.

Ar filip.



Skol veur Drouized, Barzed, hag Overed Breiz Vihan

LETTRÉ AUX ANCIENS BARDES

Druides, Bardes, Ovates.

Le Bardisme est la plus ancienne institution des Gaulois, des Gallois, et des Gaëls. Ses éclipses ne compromettent pas sa durée. Restaurée en Armorique en 1899, des circonstances implacables l'ont secouée en 1944. Mais un gorsedd kuz tenu à Nantes, le 11 Octobre 1947, sur mon initiative, a reconstitué notre Académie sur de nouvelles bases. L'année suivante, au gorsedd kuz de Rennes, j'ai décidé de me retirer de l'activité, et de passer la main à des hommes jeunes et qualifiés, ayant l'oreille de la nouvelle génération. Il était urgent d'infuser au Collège un sang nouveau, car la plupart des Anciens étaient, ou morts ou entrés en sommeil.

La nouvelle équipe est décidée à orienter le Gorsedd vers des buts répondant strictement à ses Statuts (Reizadur Diabarz). Les méthodes seront sévères. Elles doivent être plus efficaces que celles d'autrefois, où un certain laissez-aller était d'usage. Aujourd'hui, un monde différent du passé est né. La Révolution de 1944 a créé de telles conditions de vie, que les Nations, grandes ou petites, sont contraintes de se montrer *totalitaires*, sous peine d'être absorbées et détruites. Il en est ainsi des Bretons, des Gallois, des Irlandais et des Ecossais. Le *Gorsedd*, aux mains d'une nouvelle Ecole, l'a compris, puisqu'il exige dorénavant la connaissance de notre langue nationale pour être admis. Ceux qui n'auront pas le courage d'apprendre le Breton, écrit le *Kelc'h-lizer* de Noël 1952, ne sauraient plus accéder au titre de Barde.

Bardes d'Honneur.

Ceci vaut pour le Présent et l'Avenir, mais *quid* du Passé ? Nous avons, en effet, dans l'Entre-Deux-Guerres, élu Bardes d'Honneur un grand nombre de notabilités en raison des services rendu par elles à la Bretagne dans tous les domaines, sans tenir compte du fait qu'elles ignoraient le Breton.

J'ai consulté, à ce sujet, les responsables de la ligne de conduite que le Gorsedd entend suivre et il a été décidé qu'aucune discrimination ne sera faite entre les Bardes d'Honneur nommés avant 1944 et leurs confrères Bretonnistes en activité. Ce qui est acquis est acquis.

Par conséquent, nos anciens Bardes d'Honneur auront toujours accès aux Gorsedds Kuz et aux Gorsedds Digor, avec droit au port de l'écharpe bleue.



Je profite de cette mise au point, pour convoquer tout particulièrement les Anciens Bardes Actifs et Honoraires, même ceux qui n'ont pas donné de leurs nouvelles depuis 1944, ainsi que nos Membres Celtes d'Outre-Mer, à assister au Pré-Gorsedd Digor de l'Abbaye de Boquen, Côtes-du-Nord, le Dimanche 12 Juillet 1953. Il faut arriver le matin et partir de chez soi la veille. Boquen est à proximité de Plénée-Jugon, de Lamballe et de Loudéac. Je rappelle que les 12, 13 et 14 sont fériés. Le 12, au cours d'une grande cérémonie religieuse, Dom Alexis, Abbé Mitre, recevra solennellement les reliques de plusieurs vieux Saints Nationaux du V^e siècle. Ensuite aura lieu une cérémonie druidique, un banquet populaire et un pardon. Les femmes seront admises, par décision de l'Abbé, qui est l'Aumônier du Gorsedd depuis 1936. Ce sera pathétique, quelque chose de jamais vu et qui aura un grand retentissement.

Pour ampliation :

Le Grand Druide : TALDIR.

Le Grand Druide en fonction : EOSTIG SARZHAW.

N. B. — Adressez votre cotisation de 400 frs 1953 à M. Adrien ALLAIN, 19, avenue Louis Barthou, Rennes, Bretagne. C.C.P. 1235-48 Rennes.



(Photo *Brittia-Films*).

Distro an Itron Varia d'ar Folgoad.
Ar bobl iaouen a gan an Te Deum.